

# Kantik en honor d'ar Groaz

EVIT

FIN MISSION TREMEL

(Gouere 1901)

---

Var don : *D'hor Mamm Santez Anna.*

DISKAN :

Kanomp a greiz kalon,  
E fin ar Mission,  
Kanomp a vouez huel :  
Honor d'ar Groaz santel !

Bepred, e lec'h ma vo  
Dirazhan Kroaz Jezuz,  
Eur e'hristen a gavo  
Kentelio talvouduz

KROAZ AN TOUR

Diwar lein an tourio,  
Ar Groaz a lar dalc'hmad :  
« Kristenien, d'an Envo  
« Zavit ho taoulagad ! »

## KROAZ AN HENT

Ar Groaz war an hencho  
A lar d'an tremener :  
« Guir hent bro an Envo  
« Eo hent Kroaz hon Zalver. »

## KROAZ AN TI

Dirag holl dud an ti,  
Ar Groaz ouz ar voger  
A zesk da bep hini  
Ober mad he zever.

Diski 'ra d'ar bugel  
Bean bepred zentuz ;  
Zenti bete mervel  
Setu bue Jezuz.

D'an tado ha mammo  
E lavar hon Zalver :  
« Beillit war an ineo  
« A meuz prenet ken ker ! »

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour  
Zo ive prisiuz ;  
Ennhi e kar zikour  
Da vean gouzanvuz.

## KROAZ AR BEIO

Ar Groaz war ar beio  
A neuz eun nerz dispar  
D'ober d'ar c'halono  
Dougen pouez ar glac'har.

## KROAZ AN OD

Ar Groaz, pa ve zavet  
En kichenik an od,  
A ro fians bepred  
D'ar paour kez martolod.

Miret, ô ma Zalver,  
Dre verit ho poanio,  
Miret en pep danger  
Martoloded hon bro.

## KROAZ AR MISSION

'Vit kâd zonz da viken  
Ouz eur Mission braz,  
Er paroujo kristen  
E ve zavet eur Groaz.

Aman emeump ive  
Roët hon aluzon,  
Vit kâd eur Groaz neve,  
Kâd eur Groaz Mission.

Zavet emcump eur Groaz  
Evit diskouel d'an holl  
En Tremel n'eo ket c'hoaz  
Eet ar guir fe da goll.

Eur groaz emcump zavet  
Hag a verko dalc'hmad  
D'hon Zalver benniget  
Hon anaoudegez vad.

Mil bennoz, o Jezuz,  
Mil bennoz d'ho Kalon,  
Bet ken madelezuz  
'Vidomp er Mission.

IMPRIMATUR :

*Quimper, 24 Juillet 1901.*

F. CORRIGOU,

Vic. Gen.